

PRIZ : ur bloavezhad, 13 lur. 6 miziad, 7 lur. 3 miziad, 4 lur.

FAZIOÙ HAG A DALVEZ ARC'HANT !

Digeriñ e reomp, gant an niverenn mañ, ur c'henstrivadeg bras : eleizh a fazioù hon eus graet, a-benn-kefridi pe nann, el lizher-mañ; reoù all hon eus ar sonj d'ober el "Lizhiri" da zont. Ac'hanta, skrivit deomp d'hon difaziañ. Pep hini, kavet gantañ an niver brasañ, en devo gounezet ur c'houmanant 3 miziad, evit un all, d' AL LIZHER TREGERAT .

NIV. I , I GENVER 1964

D'an holl, bloavezh mat mat mat mat !

HERVEZ UR PELLGEAL eus Roma, an T.S. ar Pab en deus kinniget, evel prof nedeleg, d'ar vugaligoù fur eus ar Gatoliegezh, ur varrenn NOUGAD a 14 metr a hirder.

HONOLULU Mab-bihan Rener Kazetenn vrasañ Honolulu, David YVAMOTO, en deus nac'het debriñ e damm, eus barrenn nougad an T.S. ar Pab. - Peogwir n'en em gav ket fur awalc'h, eme e dud ! - Peogwir ne blij ket dezhañ, hervez kañfarded Honolulu ! Peogwir en deus droug-kof, eme ur medesin \$

ARZON Distrujet eo bet holl, gant un tangwall spontus, en un nozvezh, ti TUAL, marchadour anavezet mat er vro. Ar marc'hadourezh hag a oa bet lemmet diouzh an tan gant an dud hag ar bomperion, a zo bet skornet d'ar beure, ken yen evel ma oa an amzer !

LANDREGER Hervez un enklask etouez ar vugale sellet oute evel ar re furañ, hini ebet anc n'en deus bet an disterañ tamm nougad gant an T.S. ar Pab.

SARZHAV Hervez enklask archerion vat ar c'hanton, war lerc'h an tangwall e ti Tual, ur balenn tommerez dre tredan eo a zo kiriek d'an tangwall... 'Pez a ziskouez, eme Arzoniz e kousk an Dimzell Tual hec'h unan penn (rak war gwele ar plac'h yaouank e oa ar balenn.)

BREIZH Hervez un enklask sirivus, ar skoilh brasañ a gav an Emzav evit di-huniñ an dud eo an doan o deus ar re se da goll o fañsionoù m'ar teu Breizh da vout dieub.


AR WIRIONEZ ! Pep hini a gaso d' AL LIZHER TREGERAT UR c'helo DIEMBANN a c'hounezo ur c'houmanant 3 miziad evit an hini ma karo !



Me 'zo sur ne ouies ket petra 'zo c'hearvezet er bourg ...
-Nann 'vat. Petra 'zo bet ?
Ne ouzon ket ...
-Perak lâroust se, neuze ?
Betek gouzout !



-Ur banne hini-kreñv, Tad-kezh ?
-Ur meudad hepken, plac'hig !



-Arsa! Jan-Mañ, klevet am eus lâroust ne reec'h met touiñ pad an deiz ! N'eo ket brav !
-Daonet-e-vo, Ac. Person, piv eo mab gaet an diaoul en deus kentet ar gaou se deoc'h ?

YA ! YA ! YA ! Ar pemp koumananter kentañ d' AL LIZHER TREGBRIAT a c'hounezo pep a goumanant 3 miziad evit un all.

FAIC'HET eo bet ar foen dindan hon treid o klevout keloù eus un dezenn sirivus tre, hag a brou kaer ha splann e teu ar Brezhoneg eus yezh ar Golosed; rak ni hon boa klevet klevet komz eus un dezenn all o keñveriañ ar Brezhoneg gant ar Japaneg ! Mar gelled proufiñ bremañ e teu ivez ar Japaneg eus ar Golosag e vo skubet hon amzivin .

MALO D'AN ERZAW ! Hervez ur baperenn, an aotrou Yann P. (pe Yann X, rak fall daonet eo skrivet an dra,) a n'em lakaio war roll an emstriverion evit bezan prezidant republik war Vro-c'hall - Hon gwellañ gourc'hemenoù da Y. (P.pe X.)

ARZON Abaoe an tangwall, renket he deus tiegezh an Tualled mont da lojiñ en un ti miret evit feurmiñ d'an dourisked. Ar c'holl se a zo sellet outañ, gant Arzo-niz, evel ar mantrusañ tra .

AL LIZHER TREGBRIAT he deus an Enor da rein da c'houzout ne vo kaset an Niv.2 (nag ar re all), nemet d'ar c'houmananterion. Koulskoude, mar deo diviet ganeoc'h ho kwenneion, warlerc'h ar gouelioù ken koustus hon eus gouzañvet holl abaoe 8 deiz, kasit hepken ho koumanant he paeañ. Amzer awalc'h ho po a-hed ar bloezh da c'hounit arc'hant bras ha da soñjal ennomp.

A-HEBND-ALL, prest omp, adalek vremañ, d' ober un distaol a 30% da: Martoloded, Soudarded, Kloareged, Studierion, hag ivez d'ar Skosiz.

GRIT BREZEL OUZH AR RAZHED

ROC'H-DEBRIEN: Kazh gwenn Skol al Leanezed, ur femelenn dispar, he deus bet 9 gazh bihan diwar targazh Rener ar Sol Lik. Mar fell deoc'h lakaat mirout ur c'hash bihan, memestra, skrivit d'Al Lizher Tr. An targazh a zo du.

O FURCHAL e-mesk an dismantrou, goude ar wallzarvoud e ti Tual, ez eo bet kavet ur baner enni. I mpouchouer-godell I bakadenn kafe (re grazet) hag I litrad gwin II°. Meñkoù war mouchouer, kafe ha gwin a ziskouez ne oa ket bet prenet ar marc'hadourezh-se et ti Tual.

- O (ad)-c'houlenn e ti an "Ekonomik" -

UR VANM GOZH FUR a lavare: "Tremen pa vez, ha tremen pa ne vez ket a zo tremen div wech !" Arabat deoc'h tremen hep ar blijadur da lenn hon eil niverenn. Spi hon eus ma vo kaeroc'h eget houmañ !!!



"Tommit ar forn $\frac{1}{2}$ eur arañk; meskit gant 12 melen vi: I c'hatourenn amann, 15 loaiad koavon, $\frac{1}{2}$ litrad laezh 6 patatezenn drailhet munut gt. 3 benn-ougnon... ha lennit ar peurrest eus ar segred - mañ, war hon niverenn da zont"



-Pelec'h emeout bremañ, ifig ?
-En Gwengamp, mamm-gozh .
-War petore micher ?
-"libraire".
-O, paour-kaezh bihan !



-Ma ne bre-nit netra, arabat chom keit-se dirak